



MESSE
BRETONNE
EN L'HONNEUR
DE

SAINTE
ANNE



LA MESSE BRETONNE EN L'HONNEUR DE SAINTE ANNE, composée en Juin 1971 par Mr l'abbé Roger ABJEAN, utilise largement divers thèmes du folklore de Bretagne, ainsi que les cantiques bretons des pardons de Ste Anne.

Elle fut chantée pour la première fois le 25 Juillet 1971 dans l'antique abbaye cistercienne du Relecq et retransmise en direct par la station d'Inter-Bretagne.

Un disque en fut réalisé à cette occasion. Les interprètes en sont: l'Ensemble choral du Léon (Morlaix-Plouguerneau et Landivisiau) sous la direction de l'auteur; Claude Mérier, à la bombarde; Michel Cocheril et François Roudaut, à l'orgue positif Yves Sèvere. La 2ème face de ce disque est consacrée au festival de musique du Relecq auquel participaient aussi divers chanteurs (Eliane Pronost, Triona O'Donnell...) et instrumentistes (Imré Némès, clarinette; Eribert Cheider...). Ce disque vous sera proposé, avec d'autres enregistrements de l'Ensemble choral du Léon, à la sortie de cette messe.

Cette réalisation a été possible grâce au concours de la Chambre de commerce de Morlaix, de l'Association des "Amis du Relecq" et des animateurs du Parc d'Armorique.



ENTREE : BINIOU ET ORGUE

KAN AN DIGOR (chant d'entrée)

D'OR MAMM ZANTEZ ANNA

Diskan: D'or mamm zantez Anna,
D'an l'tron Varia,
D'or Zalver benniget,
Ni 'vo fidel bepred.

- | | |
|---|--|
| 1. Joa deom oll kristenien,
Gand gouel Santez Anna,
A ro joa d'an elez
O veuli Mab Doué. | 3. Na pegen kaer oc'h C'hwi
Ho muzellou ken koant!
Rag-se oh benniget
Gand Doue da viken. |
| 2. Birvi 'ra em halon
Komzou c'hwég ha laouen
En énor d'ar Roué,
E vo va hanaouenn. | 4. C'hwi'peus karet ar Mad
Ha tehet diouz an droug;
Rag-se oh, gand Doue,
Sakret gand eol ar joa. |
| | 5. Gloar da Zoue an Tad,
D'ar Mab, d'ar Spered-Glan,
'Vel m'eo bet a-viskoaz,
Bremen ha da viken. |

SALUD AR BELEG-LID AR BINIJENN

-Salut du célébrant et demande de pardon.

- Plijet gand Doue an Tad, ha gand Or Zalver Jezuz-Krist e Vab skuilla varnoh oll beproz ha peoh.
-Meuleudi da Zoue, Tad Or Zalver Jezuz-Krist!
- Va breudeur, pa 'z'om oll peherien, taolom eur zell ennom on-unan ha goulennom pardon evid beza e stad vad da lida an overrenn.
(Un temps de silence)
- Salver Jezuz, bet digaset war an douar evid or silvidigez, Aotrou Doue, ho pet truez!
-Aotrou Doue, ho pet truez!
- C'hwi hag a zo deuet er béd-man evid gelevr ar béherien, Aotrou Krist, he pet truez!
-Aotrou Krist, ho pet truez!
- C'hwi hag a zo bremen e gloar an Tad evid tenna warnom e vadelez, Aotrou Doue, ho pet truez!
-Aotrou Doue, ho pet truez!
- Plijet gand Doue oll-halloudeg kaout trugarez ouzom, pardouni deom or pehejou ha kas ahanom d'ar vuez peurbadus! AMEN

GLOAR DA ZOUE "Gloire à Dieu au plus haut des cieux"

Diskan: GLOAR DA ZOUE, E LEIN AN NENV
HA PEOH D'AN DUD WAR AN DOUAR.

Bezit meulet, Aotrou Doue,
Mil bennoz deoh ha trugare;
A-dreuz ar bed, ni 'gan ho kloar
Ho kalloud hag ho sked dispar.

Ni Hoh ador, Doue an Tad,
Roue an neñv, Doue oll-vad;
Ken braz eo bet ho karante,
M'ho peus kaset ho Mab er bed.

Meuleudi deoh, Salver Jezuz,
Gwir Vab d'an Tad karantezuz ;
Oanig Doue, treh d'ar pehed,
Ho pet truez ouzom bepred.

Klevit pedenn ho tud fidel,
Roue ar bed, savet d'an neñv;
Da viken gand ar Spered Glan,
On Doue bec e gloar an Tad.

KEMPEDENN (Oraison)

-An Aotrou Doue ganeoh. -Ha gand ho spered.

-Pedom: Aotrou Doue, ho peus roet da Zantez Anna ar hras da
lakaad er béd ar Werhez, mamm d'ho Mab unganet,* Ni
ho péd, da genver he gouel, ma vo évidom eun alvokadez
vad dirazoh. Dre Or Zalver J.K. ho Mab hag on Aotrou
a vév hag a ren, Doue ganeoh ha gand ar Spéréd-Glan,
a oll-viskoaz da virviken. -AMEN.

LID AR GOMZ A-BERZ DOUE -Célébration de la Parole de Dieu

La promesse faite par Dieu à Abraham et Isaac, au sujet
de sa descendance, va bientôt se réaliser en Sainte Anne,
et en son époux Saint Joachim.

PENNAD EUZ LEOR PENN-KENTA AR BED. (Livre de la Genèse)

En deiziou-ze, an Aotrou Doue 'n em ziskouezaz da Izaag, hag a
lavaras dezañ: "Na ziskennit ket da Vro-Ejipt, méd chomit er
horn-douar a verkin deoh. Grit ho chomaj er vro-mañ; me a vo
ganeoh hag ho pennigo. Deoh ha d'ho pugale e roin oll an doua-
rou-mañ, evid derhel d'al le am eus touet da Abraham ho tad. Ho
lignez a lakin da greski, ken stank hag ar stered en oabl, ha
d'ho pugale e roin ar vro-man a-béz. Dre ho lignez é vo benni

get oll boblou ar béd abalamour e-neus Abraham sentet ouz va
mouez na miret va gourhemennou, va reolennou ha va lezennou."

KAN GOUDE AL LENNADEG -Chant après la Lecture

Diskan: Santez Anna, patronez vad,
Beilhit bemdez,
War an tiégeziou breizad,
Gand karantez.

1. Patronez ar Vretoned, D'or Mamm Zantez Anna,
Dirazoh ni 'zo stouet, Da bedi, da gana.
2. Savet war eun tron uhel Gwechall gand on Tadou,
Bennigit, O Mamm Zantel, On tud hag or madou.
3. Mirit e peb ti kristen, bleuniou ar zantelez,
Grit ma karim da viken, Jezuz hag ar Werhez.

-On se lève pour le chant:

ALLELUIA! ALLELUIA!
Eürus oc'h c'hwi, Anna, ho peus lakët er béd,
Ar verh oa da veza mamm da Zalver ar béd.
ALLELUIA! ALLELUIA!

KAN AN AVIEL -Chant de l'Evangile en St Mathieu.

Dieu se révèle aux humbles, aux petits.

-An Aotrou Doue ganeoh. -Ha gand ho spered.

-Pennad euz an Aviel zantel hervez Sant Vaze.
-Gloar d'eoh-c'hwi, Aotrou Krist!

En amzer-ze, Jezuz a lavaras: "Ho trugarekaad a ran, va Zad,
Aotrou an neñv hag an douar, evid beza kuzet an traou-mañ ouz
an dud desket ha speredeg, ha dizoloet anezo d'ar re vihanig.
Ya, Tad, pegwir evelse eo bet plijet ganeoh. Peb tra 'zo bet
fiziet ennon gand va Zad ha dén ébéd, n'anavez ar Mab, neméd
an Tad ha n'eus dén kennebeud a anavez an Tad, neméd ar Mab,
ha kement hini a blijjo d'ar Mab en diskleria dezañ. Deuit d'am
haoud, c'hwi oll a zo er boan ha ponner o samm, ha me ho lako
diveh ha diskuziz."

War lerh an aviel: -Acclamation après l'évangile

-Setu komzou Doue:
-Grit d'or spered komprenn komzou Doue
Ha d'or halon o miroud goudeze.

AR ZERMON -L'homélie

AR GREDO

- "Je crois en un seul Dieu..."

Ni 'gréd en eun Doue hebken
Bét a wiskoaz, 'zo da viken,
En Tad galloudek oll meurbéd,
A grouaz euz netra ar béd.

Ni 'gréd er Mab, Salver ar béd,
D'ar maro 'vidom bet lakeet;
D'an trede deiz savet da véo,
E gloar an neñv, 'skéd vid atao.

Ni 'gréd start er Spered Santel
A gendalh ato e skoazell;
E sklerijenn a splann er béd,
Harp d'or buhez a ro bepréd.

Ni 'gréd en eun Iliz santel
A zo unan hag oll-vd
E savim eun deiz a varo
'Vid ar vuhez a bad atao.

AR BEDENN-ZUL

-La prière universelle:

-Aotrou Doue madelezuz,
Klevit or pedennou.

OFFERTOER: Offertoire: Bombarde et orgue

PEDENN WAR AR PROVOU -Prière sur les offrandes

Sellit gand madelez, Aotrou Doue, ouz ar sakrifis-mañ: ra
gresko ennom ar hoant d'o servicha ha gras ar zilvidigez,
gand sikour pedennou Santez Anna, he deus laket er béd ar
Werhez, mamm d'Or Zalver, Jezuz-Krist. Amen

AR PREFAS

-An Aotrou Doue ganeoh.
-HA GAND HO SPERED.

-Ho kalon d'an uhel. -TROET EO WARZU DOUE.
-Lavarom bennoz da Zoue on Aotrou. -JUST HA SANTEL EO.

E gwirionez, just ha santel eo
ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
C'hwi, Tad Santel,
Aotrou Doue oll-hlloudeg ha peurbadel.

Rag C'hwi ho peus roet da Zantez Anna an enor kaer
da gaoud evid merh an Itron Varia,
dinamm a behed, gwerhez heb par,
Mamm da Jezuz-Krist, Or Zalver;

Ha d'ar Vretoned, ho pobl fidel,
ho peus roet Mamm goz ho Mab karet da batronez
evid o divenn ha beilla warno bepred.

Setu perag, a-unan gand an elez hag an oll zent,
e savom or mouez da veuli ho kloar,
en eur lavared a-greiz kalon:

SANTEL! Santel! Santel an Aotrou Doue, Mestr ar béd!
Leun eo gand ho kloar an neñv hag an douar. Hosanna
e barr an neñvou! -Benniget an hini a zeu en hano Doue.
Hosanna e barr an neñvou!

PEDENN-VEUR N° 2:

-Prière Eucharistique

E gwirionez, C'hwi 'zo santel, Aotrou Doue,
hag ahanoh e teu pep santelez.
Plijet ganeoh eta, santellaad ar profou-mañ,
dre nerz ho Spered-Glañ,
ma teuint da veza evidom
KORF ha GWAD Or Zalver Jezuz-Krist

En noz ma oa gwerzet
ha m'en em ginnige deoh evid gouzañv e Basion
Jezuz a gemeras bara,
ha goude beza rentet deoh bennoz ha trugarez,
e dorras hag hen roas d'e zikibien
en eur lavaret :

" Kemerit ha debrtit euz hemañ,
Rag va Horv eo, roet evidoh. "

Evelse hoaz, goude koan,
e kemeras ar halirad gwin,
e rentas deoh adarr bennoz ha trugarez,
hag hen roas d'e ziskibien en eur lavaret :

" Kemerit oll hag evit euz ar halirad-mañ,
Rag va gwad eo,
Gwad an engleo nevez ha peurbaduz,
a vo skuillet evidoh hag evid an oll dud,
da bardoni ar pehejou.
C'hwi 'raio kement-mañ
gand ar zonz ahanon. "

SALUD d'ar ZAKRAMANT Ar Beleg: Setu amañ
Mister ar Feiz

An hoñl : Ni zonz gand feiz, Salver Jezuz,
En ho maro ken presiuz.
Meuleudi deoh savet a veo.
Ni ho kortoz da zond en-dro.

Gand ar zonzj eta, euz Or Zalver maro evidom,
Ha savet euz ar bez leun a vuez,
e kinnigom deoh, Aotrou Doue,
bara ar vuez ha kalirad ar zilvidigez,
gand or bara trugarez,
evid an digemer a rit deom, amañ,
hag an eurvad da halloud kinnig deoh an Overenn

Gand eur galon izel
e reom ouzoh ar bedenn-mañ,
Pa gemerim bremaig, Korv ha Gwad Or Zalver,
ra vezim unanet kenetrezom
dre ar Spered-Santel.

Ho pet sonj, Aotrou Doue,
Euz hoh Iliz, skignet dre ar bed a-bez.
Drit ma kresko enni ar garantez,
a-unan gand on Tad santel ar Pab,
an Aotrou 'n Eskob,
ha kement nini e-neus karg euz ho pobl.

Ho pet soñj c'hoaz euz or breudeur eet da anaon
gand an esperañs da zevel a varo da veo,
hag euz an oll dud tremenet :
Roit dezo ar joa da weled
sklerijenn ho tal en ho Paradoz.

Warnom-ni, ivez,
plijet ganeoh skuill ho madelez,
ma hellim kacud perz er vuez peurbaduz,
a-unan gand ar Werhez gloriuz Vari, Mamm da Zoue
Gand an Ebestel eüruz hag an oll Zent euz peb
amzer;

rento deoh neuze gloar ha meuleudi
dre Jezuz-Krist ho Mab karet
A zo dreizañ, ha gantañ, hag ennañ,
deoh-C'hwi, Doue an Tad oll-Halloudeg,
a-unan gand ar Spered-Glañ,
Pep gloar ha pep enor,
a oll-viskoaz da virviken. AMEN !

AR BATER "Notre Père"

ON TAD hag a zo en neñv,
hoh ano bezet santellêt,
ho rouantelez deuet deom,
ho polontez bezet grât
war an douar evel en neñv.

Roit deom hirio or bara pemdézieg,
pardonit deom or pehejou
evel ma pardonom d'ar re o deus mafket ouzom;
ha n'on lezit ket da goueza en tentadur
méd on diwallit diouz an droug.

-On dizammit, Aotrou Doue diouz pep droug, ha plijet ganeoh
rei deom ar peoh en on amzer, ma vezim bepred, dre ho made-
lez, distag diouz ar pehed ha diwallet diouz an oll drubuil-
lou, da hortoz an eürusted a èspérom, ha distro Or Zalver
Jezuz-Krist.

-DEOH AR ROUANTELEZ, AOTROU DOUE,
DEOH PEB GALLOUD HA PEP GLOAR
DA VIRVIKEN.

-Salver Jezuz-Krist, C'hwi ho peus lavaret d'hoh ebestel:
"Ar peoh a lezan ganeoh, va feoh a roan deoh",
na zellit ket ouz or pehejou
met ouz feiz hoh Iliz,
ha plijet ganeoh, hervez ho polontez,
he lakaad er peoh hag heh unani.
C'hwi on Doue beo ha leun ha hloar,
a oll-viskoaz, da virviken.

-Peoh Or Zalver ra vo bepred ganeoh -AMEN.
-HA GAND HO SPERED.

OAN DOUE -Agneau de Dieu.

-Oan Doue a zilamm pehed ar béd, ho pet truez ouzom (2f.)
" " " roit deom ar peoh.

AR GOMUNION -La communion

-Jezuz-Krist, va Zalver, pa 'z'an da gemer ho korf hag
ho kwad, mirit na drofe ar gomunion-mañ d'am barn ha
d'am hondaoni; méd abalamour da garantez ho kalon,
grit ma talvezo d'am diwall ha d'am farea korf hag ene.

-Eüruz ar re a zo pedet ouz taol Or Zalver:
Setu oan Doue, an hini a zilam pehed ar béd,

-VA DOUE, N'ON KET DIN E TEUFEH BETEG ENNOM,
MED LAVARIT EUR GER HEBKEN HAG E VIN PAREET.



EPAD AR GOMUNION

-Cantiques de communion
et d'actions de grâces.

I. DEUT VA DOUE.

Diskan: Deut va Doue, deut da rén em halon;
Deut d'am maga dre ar gomunion.

1. Va ene paour a zo ouz ho kortoz, va Zalver,
Evel eun douar yén, skarnilet gand gwall amzer.
2. Ma z'eo gwir ho komzou, c'hwi a vezo d'am ene
Glaodous an abardaez, pe glizennig ar beure.
3. C'hwi eo ar pastor mad, me an dañvad diañket:
Edon 'kreiz ar bleizi, hag ho peus va diboaniet.
4. Ma z'oh ar médisin, me, siouaz! eo ar hlañvour:
Louzaquit ar gouliou grêt din gand va enebour.
5. Medisin, pastor mad, n'eo ket awalh kement-se:
Em heñver, c'hwi 'zo c'hoaz eun Tad leun a garanté.
6. Dre ma tostaan ouzoh, ha dre ma tomm va halon,
Hi lavar ez oh c'hoaz he fried hag he mignon.
7. Rag-se 'ta, va Jezuz, me 'zeu da glask ho panked,
'Vel ma réd ar haro d'ar feunteun en é zehed.
8. Evel ma vév ar skourr p'émañ stag ouz ar wezenn,
Dre nerz ho sakramant, ouzoh 'vin stag da viken.

2. JEZUZ A OLL-VISKOAZ.

1. Jezuz a oll-viskoaz, ennon ho peus sonjet.
Jezuz a oll-viskoaz, C'hwi ho peus va haret.

Diskan: O Kalon zakr Jezuz, kalon zakr va Doue,
Entenit va halon gand tan ho karante.

2. Petra ho touge c'hwi, da rei din ar vuez?
Petra ho touge c'hwi, nemed ho karantez?
3. Perag euz lein an neñv ez oh bet diskennet?
E kraouig Bethléem? -Rag m'ho peus va haret.
4. Jezuz, war ar halvar, pe li-amm ho talhe
Astennet war ar groaz? -Li-amm ho karanté.
5. Petra 'felle deoh c'hoaz en eur zevel d'an nenv?
-Digor ar baradoz d'ho pobl a garanté.
6. Koulz a war ar halvar, ho kalon, va Zalver,
Evidon-me bemdez a verv war an aoter.

LID KLOZA AN OVERENN Rites de conclusion

- An Aotrou Doué ganeoh,
- Ha gand ho spered.

PEDOM: Maget gand ar bara euz an nenv, ni ho péd, Doué,
On Aotrou, da rei deom gras ar zilvidigez peurbaduz,
gand sikour pedennou Santez Anna he deus lakêt
er béd ar Werhez, mamm d'or Zalver Jezuz-Krist,
Doué béo ganeoh ha gand ar Spéred-Glan,
a-oll viskoaz da virviken.

-AMEN.

- An Aotrou Doué ganeoh,
- HA GAND HO SPERED.
- Doué oll-halloudeg d'o penniga, an Tad, ar Mab hag ar
Spered-Santel. -AMEN
- Kerzit e peoh or Zalver. -BENNOZ HA GLOAR DA ZOUÉ.

=====
CHANT DE SORTIE: ITRON SANTEZ ANNA

1. Itron Santez Anna, ni ho péd a galon,
Ni en em lak gand joa dindan ho proteksion.

DISKAN: O Rouanez karet an Arvor,
O mamm leun a drué,
War an douar, war vor,
Goarnet ho pugalé.

- | | |
|---|---|
| 2. Ho kalon 'zo digor
'Vid oll ar Vretoned;
An dud euz an Arvor
Ho kar ivé bépred. | 3. Patronez Breiz-izel,
An Arvoriz gand gréd
A houlenn ho skoazell;
On diwallit bemdé. |
|---|---|

3. O mamm santez Anna,
Dindan ho tiouaskell,
Pégen kaer eo béva,
Pégen dous eo mervel.



